

ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur —
SKRIVEREZH HA MEREREZH
G. BERTHO, 72, Str. Oberthür,
Roazhon (K.R.P. 492-88, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET kas
C'HWEC'H REALAD timbroù pep
gwech ma fell deoc'h kemañ
ho chomlec'h.

**Dalc'het en amze-
rioù diaes kenañ,
berzh en deus graet
Kendalc'har Framm
Keltiek. Diskouezet
odeus ar Vrezhoneg
o feiz en amzer-da-
zont o bro.**

PEMPVET KENDALC'H BRAS « FRAMM KELTIEK BREIZH »

KUDENN ENKLASKOU "ARVOR" AN ANVIOU SKIANTEK

Kendalc'h Bras Framm Keltiek Breizh a voe dalc'het e Roazhon er bloaz-mañ adarre, peogwir e teu diaesoc'h-diaesañ an darempredoù hag ez eo c'hoazh ar gêr-se an hini aesañ mont betek enni.

Souezhus an niver a dud, brezhonegerion an darn vuiañ anezho, a oa doredet e Roazhon eus an 18 an 21 a viz Mae, daoust ha diaes ha risklus beajiñ, daoust hag un torr-penn kavout boued ha lojeiz, daoust da holl arvarioù an amzer-mañ. Brezhonegerion dreist-holl, a lavaran ; ar re-se, e gwirionez, o deus diskouezet ur wech ouzhpenn o c'halonégezh, pa vez meneg labourat evit o bro hag o yezh.

Dalc'het e voe ar bodadegoù-studi e Palez ar Breujoù evel boas. D'ar yaou 18, ne oa nemet bodadegoù gallek. An Ao. Rual, anavezet mat gant ar re a bleustr war gudennoù an artizanelezh, a gomzas eus « Nevezadur Arz ar Bobl » ; lavarout a reas petra a oa d'ober, d'e veno, evit reiñ en-dro d'an artizaned ar garantez ouzh o micher hag ar c'hoant ober labourioù kaer, ha diskouez a reas un nebeut skouerennoù eus an arz poblet nevesaet-se. Lennet e voe goude un danevell gant an Ao. Stany Gauthier, na o'helle ket dont da Roazhon, diwar-benn an enklask d'ober evit dastum doareoù pennañ an ornadurezh vreizhek. Klozet e voe an devezh gant ur brezegenn graet gant an Ao. Florian Le Roy, « Evit ul lennegezh-broioù ».

D'ar gwener 19, diouz ar beure, e voe ivez div brezegenn c'hallek da gentañ gant an It. Nizan diwar-benn « Ar Vrezhoneg divroet e Mervent Bro-C'hall ». Komz a reas an It. Nizan eus hor c'henvroiz, meur a vil anezho, set da annezñ goude ar brezel all e broioù Mervent Bro-C'hall, Perigord dreist-holl, peuzdilozet gant o broiz ; roet o deus d'ar re-se skouer al labour hag an niver a vugale ; chomet int feal d'o gizioù ha d'o yezh, dindan blenidur o aluzener, an Ao. Meveleg. Goude e voe graet ur brezegenn gant an Ao. Marion Le Bastard, « Roazhon en amzer an Duged ».

D'an abardaez e voe bodadeg-studi ar vrezhonegerion dindan renerezh Roparz Hemon. Hemañ a lavaras e vije disheñvel un tammig ar vodadeg-studi er bloaz-mañ : e-lec'h goulenn prezegennoù digant an dud e vije pleustret gant an holl a-gevret war gudennoù resis. Hevlene e oa da studiañ « Stad ar studioù keltiek e Breizh abaoe 1925 ». Ur c'hrennad a reas ar prezegenner eus al labour graet, gant GUALARN dreist-holl, war dachenn ar geltiegouriezh. Kendalc'het e vo gant al labour-se hag gwellaat e vo o'hoazh, dre zastum levrioù ha skoliata an dud war eifennoù ar soniadouriezh.

D'ar sadorn 20, e voe da gentañ e galleg « Bodadeg ar Yaouankiz », ma voe divizet krouiñ un « Unvaniezh Yaouankiz Vreizh » enni an holl strolladoù re yaouank ; ha goude e voe bodadeg B. A. S., ma voe displeget gant Dorig Ar Voyer ha Polig Monjarret al labour dispar graet gant o strollad savet bloaz 'zo endeoun.

D'an abardaez, eil bodadeg-studi ar vrezhonegerion : studiet e voe an doare da virout an darempredoù etre ar vrezhonegerion, mar bez harzet ar c'helaouennoù gant an douer a dredan. Divizet e voe krouiñ ur strollad stourmerion evit ar brezhoneg, a ziskoueze youl start ar vrezhonegerion da strivañ evit o yezh daoust da bep tra.

Diouz an abardaez e voe studiet kudenn ar skolioù. Ne vo ket gallet

hevlene ober ur skol-hañv ; klaset e vo ober gwollikañ ma vo gallet evit kentelliañ ar vugale dre lizher. Komzet e voe goude eus ar c'helennadurezh uhel e brezhoneg, hag eus al labour graet er « Skol Uhel Emil Ernod » savet e Roazhon e miz Here 1941 evit studiañ e brezhoneg ar vrezhonegouriezh hag ar geltiegou-

riezh. En diwezh e voe breutaet diwar-benn astenn ar skolioù dre lizher : ouzhpenn skol dre lizher ar vugale e vo klaset kentelliañ dre lizher an istor, an douaroniezh hag lizher : ouzhpenn skol dre lizher ar c'hembraeg.

Klozet e voe ar C'hendalc'h gant ur vodadeg veur d'ar sul 21. A. E.

REDERIEH-VOR


gant Youenn DREZEN

Pevar e oant, azezel, en ostaleri an Triskell, e Roazhon, dirak pep a vanne muskadig, ha kaoz ganto, evel ma lavarin deoc'h bremaik. Mes, da gentañ, graomp anaoudegezh ganto.

Setu R.-Y. Creston, eus St-Nazer.

golo 1939, ez en em gave en enezegoù Feroë.

Ha setu Roparz Broudig, Gindik eo hemañ eus Montroulez, hag o chom e Biliian. Ur vag en deus, ha gounit a ra e vuhez, o pesketa er-maez da nadoù Lanuon. Broudig,



Aber Pollurinn, gant he bagoù-moruela hag e venezioù-skorn, en Enez Island

Evit da hemañ bezañ arzour ha livour eus e vicher, martolod eo ivez. Er bloavezh 1930, ez eas gant ul lestr-chaluter, eus Fekamp, betek ar Spitzberg, du-se, er Mor Gwenn, d'ober ar peskerezh. Bet eo abaoe er Groenland, e bourzh *Pourquoi-Pas?* an D' Charcot. Pa voe diskleriet ar brezel, e gwen-

ouzhpenn meur a droiad pell, en deus kavet an tu da vont da Enez Sant-Paol, e Traon ar Bed, d'an Enez Sant-Paol-se, en tu-mañ da enezegoù Kergelen, wrudet gant an darvoudoù a skous eno paotred Konk-Kernev, ur penzek bloaz 'zo bennak.

(Kendalc'h p. 2.)

AR VRETONED DRE AR BED-HOLL

Ar Vretoned en Havr-Nevez

gant Nog KERNOA

Ur bern trevadennoù a zo bet gounezet da Vro-C'hall gant ar Vretoned, a vez lavaret. Ne vezer ket souezhet gant se pa anavezet nerzh-kalon hor martoloded, ken dispont ma 'z eont betek ar morioù pellañ da c'hounit o boued.


Hogen ne deont ket ken pell atav ; lod a zilestr o fesked er porzh tostañ evel e Sant-Yann-Luz, er Roc'hell, hag ur wech kemeret ar boaz ganto da zampredañ ul lec'h e kasont o ziegezh da vevañ di, evit mare ar pesketaerezh da nebeutañ. E Kiberen zoken ez eus bet krouet evel-se ur wir rannvroig vigoudenn gant martoloded ar Gelveneg, un drevadenn gerneval e-kreizig Bro-Wened.

Evel-se e c'hoarvezas sur a-walc'h er XVI^{vet} kantved pa grouas Frañsez I-añ a Vro-C'hall porzh an Havr-Nevez, e 1517. Edod er mare-se o paouez kavout douaroù nevez Amerika, hag un nebeudig goude e llec hor c'henvroad Jakez Karter gweladenniñ Bro-Ganada evit ar wech kentañ. Evel en Naoned e kreskas buan pinvidigezh an Havr-Nevez gant ar c'henwerzh bras a reas gant ar broioù nevez. Martoloded vreizhat a zeredas di, sur a-walc'h, hag abaoe int deut niverusoc'h-niverusañ. Kent ar brezel e kaved en Havr-Nevez, war a leverer, ur 50.000 bennak a dud gant e Breizh pe Vretoned dre o

nemeti a-raok ar brezel. Ur wir enezenn eo, bevnet a bep tu gant lennoù-porzh bihan pe vras.

Div straed ledan hepken a dreuz en enezenn, ru Faidherbe hag ar ru « de la Crique », hag a bep tu dezho ur bern straedoùigoù strizh-meurbet, kafedioù ha stailioù a bep seurt a-hed ar re-se. Eno e kaver c'hoazh tiez kaerañ ha koshañ an Havr-Nevez a-wechall, tiez bras ha pinvidik savet en amzer Herri IV pe Loiz XIII.

(Kendalc'h paj. 3)



An Havr-Nevez hag ul lodenn eus karter ar Vretoned

An Amzer o Tremen

Ar brezel nemetañ a ga da vat, taer ha kriz, a zo brezel ar c'hirri-nij, o'h hadañ ar freuz hag ar reuz war gerioù sivilid dizifenn : war-dro 5.000 den a zo bet lazhet evel-se, e-pad gouelioù ar Pantekost, ken nemet e bro-C'hall, en Orleans, Angers, Lyon, Sant-Etienne, Marsilho, Nizza (Nice), Avignon, Nimes, Amiens, Epinal, Cambrai, Bauvais, Boulogne-ar-Mor, h. a.

'vel lavarfe Arzel Even, laketa a reont skeudennoù da ziwanañ aes tre en hor spered.

Evel kel lies lenner ARVOR ez eo bet degouezhet d'ar gerioù « Ichthyosaurus » « Pterodactylus », « Papilionacae », pe reoù heñvel, kouezhañ dindan va zaou-lagad. Ur wech bennak e tiguren va geriadur evit gouzout petra oa al loened isklis-se. Peurvuiañ e stlapan pell diouzhin ar penad-skrid dihatu, droug ennon o welout ne oan ket barrek da gomprenn mann ebet drezon-me va-unan ; rag ret eo gouzout mat ar latin hag ar gregach, a-raok bezañ gouest da 'n em zibab !

M'am befe lennet Peak-Gurlaz e-lec'h Ichthyosaurus, Askellvizeg e-lec'h Pterodactylus, Balafenneget e-lec'h Papilionacae, ne vefe ket bet, a-dra-sur, kement a zroug ennon.

(Kendalc'h p. 2.)

Selaouit 'ta !

Pedñ a reomp start hor c'henskrivrien, pa gasont dimp keloù eus o bro, kuit a lizher, da lakaat atav war ar paper a gasont o anv hag o chomlec'h. Ha trugarez dezho holl evit ar skozell a reont dimp !

WAR DACHENNOU AR BREZEL, EN ITALI

Eus Menez Cassino da Nettuno

Setu adkroget an emgannoù adarre en Itali-Izelañ : ar Saozon hag an Amerikaned o klask toullañ hent war-du Roma, an Alamaned o virout outo da vont war-raok. Gant piv ez ay an trec'h an taol-mañ, Doue a oar, ha gwelet e vo. Pezh

a zo sur eo e vo distruj spontus adarre er vro reuzeudik-se, bet mac'homet a-holl-viskoazh gant alouberien a bep bro hag a bep gouenn. N'he doa ket gwelet c'hoazh, avat, an Amerikaned gant o c'hirri-nij hag o « mekanikoù sivilizet ». Barbared ha Sarazined an amzer gwechall n'oant nemet bugale e-kichen an Amerikaned evit pezh a sell an distrujañ. War-lerc'h Attila gozh eo diwanet ar geot endro, kaer en deus bet fougeal. Daoust, avat, hag adsevel a ray kouent meur Bencadiz a-ziwar e zismantroù, war Venez Cassino ? Diaes eo krediñ. Ur c'holl mantrus e pep keñver eo bet dismantraded ar Gouent-se gant bombez an Amerikaned.

Anat e vo an dra da lennerien Arvor, p'o devo pleustret war ar pennad-mañ da heul bet skrivet aratozh evito.

Seizh lev ha tregont bennak diouzh Roma war hent Naplez emañ Menez Cassino (Cassinum al (Kendalc'h p. 2.)

D'HOL LENNERIEN

Souezhet eo bet hol lennerien, ker sur ha tra, gant niverenn « Arvor » ar sizhun diwezhañ. Tounet e oa bet an tredan digant hon ti-mouler-vezh, war zigarez arboellañ, ha ret eo bet doemp aozañ ha moulañ ar gazetenn gant an dorn.

A drugarez Doue, ez eus en em gavet tud er Prefeddi Meur evit Breizh o kompren kudenn ar Brezhoneg, hag o houlenn ma vo roet doemp hor gwir endro.

Dre o grad eo e c'helle « Arvor » kenderc'hel da vevañ moulet.

